

CHANSON NEVEZ,

VAR SUJET DAOU ZEN YAOUANG

PERE EN EM GARIE GANT FIDELITE.

*Var un ton nevez.*

A Bailârd, Horac, Tibul, Catal, Ovid, Orphe,  
Choui, modelou sincer deus ar güir amitié,  
Laquit oll em guenou ho proposiou charmant,  
Inspiré em speret va c'halon languissant.

Me ya da zisclêrya va buez meleurus ;  
Tostaît d'e c'hlêvet, tud yaouanc curius ;  
Deut oll da bartaji va glac'har, va c'hlê mou,  
Ha formit ganén-me ur leuntuñ a zaelou.

En escopti Treguer e voa ur plac'h charmant,  
Hac e doa ravisset calon meur a zen yaouanc ;  
Demeus an oll merc'het a meus darempredet,  
Hy eo dre breferanc dreist oll a meus caret.

Mes he sellou gen douc, hac he c'homzou deread,  
He furnes, he doucder, hac e bolontez vad  
Alumas em c'halon flammou an amourouset ;  
Bep instant va speret voa ganti occupet.

Var sovennou yaouanc, gant beg ur ganivet,  
Tro-var-dro hon hand lies am cus scrifet.  
Choui, pluteannou eürus, a gresco nos ha de ;  
Ni garfe eveldoc'h e cresque hon amitié.

Ne meus mui a blijadur nemet arru e vez

An deiz d'allout güelet objet va c'harantez :  
 Ennàn ma residanç dezir va fantazi,  
 A guement zo'r bed-màn ne garan nemet-hi.  
 Mes, allas ! forcet eo chaden ar blijadur ;  
 Troet va flaneden en flemmon dinatur :  
 Brémàn a dra certain vezo rêt e c'huitât !  
 Mancout ra va c'halon, sclerder d'am daoulagad.

Doùe oll-Buissant ! roit din assistanç,  
 Vit m'allin d'am mestres mout d'annouç ar setanç :  
 Me a ya c'hoas ur vech bete ty va mestres,  
 Gant ur galon carguet ; leun a dristidiguez.

Cetu me vis-a-vis d'am güir muya-carez,  
 Princes an amitié, model an oll merc'het,  
 Va oll gontantamant, oll joa deus va speret,  
 Hi a garg va c'halon bep heur ha bep momet.

Neus netra endro din na repet d'am memor :  
 An amitié fidel a zo dreist pep sort tenzor ;  
 Mes bréma e redoubl oll glac'har va speret,  
 N'allàn qet comz outi, qement e zòn mantret.

Abondanç va daëlou a deu d'am daoulagad ;  
 Carguet eo va c'halon demeus a huanad.  
 Petra zo, va mignon, ma zoc'h qen desolet ?  
 Deus hoc'h affliction contit din ar sujet.

Qeuz meus a greiz calon o velet ho tourmant,  
 Me garfe ve'm pouvoar rêt d'ec'h soulajamant.  
 D'am auui, d'am glac'har c'houi a zo calz qiriec ;  
 Abars vare'hoas vintin me a vo partiet.

Possubl ve, va Doue, e ve güir qementse,  
 E'vec'h-u deut amàn vit qemer ho conge !  
 N'en deo nemet re vouir ; partia a vo ret ;  
 Arru eo va c'herent da brounç va arret.

Arça, va servicher, e zit-ta d'am c'huitât !  
 Penaus a rin brémàn ? Houmàn zo calonad !

Va oll santimanchoù zo ganec'h gonezet;  
 Me a vo maleurus, ma vemp dispartiet.

Arrêtit ho tañlou, n'en em desolit get;  
 Bars ur mis d'ar pella me zeui c'hoas d'ho quelet,  
 Qemerit confiance ha chomit en ho peoc'h;  
 C'houi eo va oll esperanc: ne garan nemedoc'h.

Allas! va zervicher, n'en deo get hep rêson  
 E velit ho mestres e get bras affliction:  
 P'o po cheuchet a vro, c'houi chencho a lezen;  
 Ur vestres all o po, c'houi'm dilezo a grenn.

Ha pa ve laquet entrezomp-ni hon daou  
 Qement demeus a hent vel zo ac'han d'an evou,  
 Credit en assuranc, bigen n'ho titezàn:  
 Bigen mestres n'am ho met an hini brêmàn.

Birvigen n'ancouezàn ar pezh a zo tonet,  
 C'houi c'heus sonch va mestres, a voueliou Nedelec?  
 Em boa aon em tijesjac'h en deiz vos o tonet  
 An hini na zezire nemet beza ho priet.

Ha neuze, va mestrez, evit va c'housoli,  
 Gant un ar gen constant e teujoc'h da bropos din  
 Mouet d'an ilis vras, eno dirac Doue,  
 Da brononc ar sermant deus ar fidelite.

Etre peder ha demp'heur, ar meurs dabardae;  
 En em rentjomp en ilis an eil gant eguile,  
 Ha pa voamp daoulinet vis-a-vis d'an anter,  
 E leqejoc'h ho torn en hini ho servicher.

Gant ur galon sincer, e lac ar Sacramant,  
 Teujomp-ni hon daou da brononc ar sermant  
 Y'en em garout fidel bete fin hor huc,  
 Bigen nemet ar mazo sur n'hon dispartige.

Ha p'an be da veva genlies a vlaves  
 Evel zo a zelienn eus en ur forest,  
 Birvigen n'ancouan va doussic Jan-Yvon,



Ilijadur va speret, rouanes va c'halon.

Deus a greiz va ene, me ofrê dec'h, va mestres,  
Sacrific va speret ha va goad assambles :  
Mar trahissàn bigen va oll bromessaou,  
Doue d'am punisso a hep seurt malcuriou.

Qemerit, va mestres, vit merq a bromesse  
Diou galon peur-dreujet gant ar memes cleze :  
Var ar memes imath e cavot dessinet  
Diou durzunel yaouanq en em garie parfet.

Ho comzou, va mignon, a zoulach va c'halon ;  
Na ellàn qet credi em lesfec'h en abandon :  
Assurit din c'hoas, var ho qer a henor,  
Bigen na drahissot ur galon deoc'h digor.

Finissomp, va mignon, tost eo d'an anter-nôs,  
Arru eo an amzer, poent ê deomp repos.  
Adieu, va mestres qer, qen a vo ar c'hentàn ;  
Ha dec'h, va servicher, mes retornit buan.

Aben pemzec de goude e retornis d'e guet  
Gant calz demeus a joa, na zanten qet qerzet ;  
N'en den qet buan avoalc'h, m'am boa c'hoant,  
Me zante e lampe va c'halon triumphant.

Pa voan aru er plaç en desir va boloute,  
E qichen va mestres evit clêvet he doare,  
P'e c'honsideris ervad e chommis estonet,  
O tonet da gompren penaus e voa chenchet.

Evit parlant dezi, hi na responte qet :  
Ur flêm sco em c'halon pe guelis qer mantret.  
Au douar arozet gant daëlou he daoulagad  
& voa un test assuret demeus he c'halonad.

Ah ! m'am c'herit-u c'hoas gant güir fidelite,  
Disclêryit etrezomp bremàn ar virione ;  
Larit din ar sujet deus ho melanconi ;  
Suell eo ganén mervel eguet rêi dec'h anvê.

Allas! va zervicher, ni a vo separet :  
 Da zemezi d'un all me a zo contraignet;  
 Henvoas zo lavaret e vigen goulennet :  
 Se a zo qiriec din ma zòn qen glac'haret.  
 C'honi, Mari, va mestrez, am lez en abandon,  
 Goude ho peza laqet rouanez em c'halon!  
 Honnes eo ar recompanç e meus-me meritet  
 Goude beza ho caret re dreist an oll merc'het.  
 Me ho ped, va mignon, na reprochit qet din  
 E ve va deslin breman dont doc'h abandoni.  
 Possubl ve'm accusac'h a infidelite!  
 Ne meus discuezet dec'h nemet re garante.  
 Gout ouzoc'h coulz ha me pegument ho caran;  
 C'honi zo caus d'am zompant pini a anduràn :  
 Va oll garante voa gonezet oll ganec'h;  
 Va brassa plijadur voa oboissa dec'h.  
 Bepret on n'em rentet gant guir fidelite  
 Bars an andret fixet herves ho polonte.  
 M'am bige eveldoc'h nebeutoc'h carante,  
 M'em bige ho quittet hep nep difficulte.  
 Me garje na vijemp biqen en em velet,  
 Pa zeo ret demp hon daou beza dispartiet :  
 Ma vije arru ar poent da veza demezet,  
 Credit penaus biqen d'am zad n'am bije pleguet.  
 Goude ar plijadur teu an desolation :  
 N'oufac'h mui eguedon caout seurt affliction  
 Eguet d'am separi deus desir va c'halon;  
 C'honi voa va zervicher, va oll gonsolation.  
 Ebars em flaneden o pebes chenchamant!  
 Honan zo evidon ur voalen a dourmant!  
 Va auzer dremenet am chagrin, va mestrez,  
 Pa deu din da gompren bars em flijadures.  
 Souch oc'h eus a vis ebrel, ar zul goude creiz-de



E rojoc'h din ar gach demeus hoc'h amitié :  
 Nan, hiscoas va speret ne voa bet gen joaus ;  
 Hauval voa hon boneur d'ar sperejou eurus.

Mes bremàn é mantret gant an oll dourmanchou.  
 Me grede parlet mad e vijemp priejou :  
 Un esperanc gen douç a rejouisse va c'halon ;  
 Me zouje na vije biqen separation.

Mes achu é va boneur hac achu evit biqen ;  
 N'en em zissipo qet evel ma ra'r glizen,  
 A zisparis en ær pa deu au col da sevel,  
 Pe vel un dornat pell güintet gant an avel.

Petra a zervich din beza laqet er bed-màn ?  
 Bea da zouffr evidoc'h, ô va mestres ! bremàn,  
 Qen hir ha va buez e pado va glac'har.  
 Me garre beza bremàn e calon an douar !

Adieu e laràn dec'h qent eguet partia,  
 Me a harlant ouzoc'h vit ar vech diveza :  
 Biqen bars er vro-màn n'ho quelàn, va mestres :  
 Bet eürussoc'h eguedoù.... Adieu evit james.

M'ho ped, va zervicher, ouzin na fachit qet :  
 Pa gollen va buez, me n'oc'h ancouain qet.  
 Birviquen n'o quelin hep monet d'ho betec ;  
 Gant calz a gouffanc deut bepret d'am guetlet.

Bet persuadet mad ho po consolation ;  
 C'houi é am eus choaset vit pried d'am c'halon.  
 Credit en assuranc biqen n'o tilczàn ;  
 James mestres n'am ho met an hini bremàn.

Ar silanc, ar glac'har ras fin d'hor preposiou,  
 Hor mouez a voa mougnet gant an lu madou ;  
 Demeus va daoulagad e rede an daclou  
 Vel ar voasiou o tiruill demeus ar montagnou.

N'ouffac'h biqen soujal qer bras desolation !  
 Me souje voa plantet ur c'hleze em c'halon ;

Carguet a zizesper, na c'houlen nemet ar c'braç  
 Ar maro ar prompta, an termen va disgraç.

Me voa het pemzec dez, ia, ha pemzec nos  
 Hep me ellis hiscoas qemer en tout repos :  
 Pa vijen em goele en dessin da gousqet,  
 Gant ar spout hac ar form e vijen difunet,

Bepret ar memes uvre a deveu incontinant  
 Da representi din an objet eus va zourmant  
 En etat m'e güelis, pa bartijomp hon daou,  
 Ar stem, an dizesper bars en hor c'halonou.

Lies e receven deus c'hélou goude,  
 Dre voyeu lizeriou carguet a garante,  
 Pere an c'honsole epad va hir-absañç,  
 O tout da jouissa deus joa an esperañç.

Cetu deja nao mis na meus gouelet va mestres;  
 Arru eo gaoen lizer digant he c'honsortes.  
 O pebeus qélou trist zo ebars anoncet!  
 A dall al lignen guenta e meus-en remerqet.

O planeden barbar, leun a velanconi,  
 Ne scuiset-u qet c'hoas ous va sersecuti!  
 Pet guech e varvin-me qent mervel en effet?  
 E prouvi ho coler, ô petra meus-me grêt!

Den ingrat ha perfid, caled ha dinatur,  
 Maro eo da vestres bars en di-plijadur!  
 N'ellis pelloc'h poursu ar c'hélou desolant,  
 Coll a ris ar güelet, an nerz, ar santinant.

Ne meus mui a c'hallout nemet evit gouela;  
 Echu ê va oll jouyou, allas! bars er bed-mâ :  
 Ne meus evit partach da chom var an douar  
 Nemet hirvoud, tourmant, melconi ha glac'har.

O Roue an êvou, mestr an Elez eürus,  
 N'oc'h eus qet va c'hrouet evit heza malcurus.  
 Disqennit bete din sell lagad a druez,



Pe laqit prontamant un termen d'am buez.

Ar spaç a drizec mis oun bet ous he c'henti,  
Ne voan em plijadur nemet pa vijen ganti :

Hi a voa an objet ens va ambition ?

Qen ne allan cavet nemet affliction.

C'hoas e viran em pres he lizer diveza  
A scrifas hi din-me qent quittat ar bed-mâ,  
Ha pa ven va-unan lies en digoran :

Pa gommançan d'e lenn, gant daclou e glebian.

Gouëlomp oll, tud yaouanc, gouëlomp oll assembles!

Biscoas plac'h na zeus bet fideloc'h eguet honnes :

Birvijen na zortio certen deus va speret;

Bete lin va buez me e c'haro bepret.

Canit-u, rossignol, gant ho mouez triumphant,

Disquézit d'ar c'hoajou hano va mestres coant;

D'ar miutin, pa bignit etrezec an êvo,

Vigilant ha fidel, repetit he hano.

Trist e qichen he bez e lacan ve c'harante;

Eunan e repos bremàn objet va amitie.

Doue vit recompanç deus he c'harante fidel,

En deus accordet dei ar joayou eternal.

Ha pa deuyo an ancou gant e fac horrerus

Da lacat un termen d'am buez maleurus,

Deus ar memes moment ma vo va goad o repos

Me jouisso ganti eus joa ar barados.

F I N.